

RECIT

*Deus eur vag a zo bet chaviret o return deus a Loguivy bet en pardon
an dreindet hac a voa arri ar ganoul an esper dont da Bleuvian.
Ar maleur man a zo arriet ar pemp varnuguent a vis ebrel 1858.*

Voir don : *Catet Gollet*

Speret sanctel me ho suppli
Reid breman ho c'hasistanç din
Ma rin eur recit truezas
Hac a vo da gals exemplus.

Gwerc'hez Vari mam d'hon Zalver
Obtenet evit eur pec'her
Ar c'bras da about disklerian
Ar malheuriou truesus man.

Au drivet sul goude ar Pasq
En hon bro eo au usaj
Mont da bardona d'an Dreindet
Eur plaç devot darempredet.

Evelse eur vag a Bleuvian
Commandet gant Pipi ar Morvan
Hac a nefoa pretantet mont di
En moraj ber dre Loguivy.

Ouspen a voa accompagnet
Gant e vreut bac e c'huerezet
Oll voaint queren ha mignonet
Deus ar memeus contre cunec.

Monet a rejont deus ar beure
Goud a rent ré suit ar mare
Rac ho esperanç voa cavet
Ofern veure bars an Dreindet.

Hac en Loguivy pa arijont
Stagjont ho bag voar an tanjon
Ha monet dre douar d'ar pardon
Da gat ofern gant devotion.

Hac evit e sitnation
Andreou Hamon deus a Beros
Eno medi ar goz Dreindet
Ze ra en parous Plairanec.

P'bo deus assistet d'an oferen
E teujont er mes da bourmen
Eur plaç laquejont da n'eum gat
Evit return are gant ar vag.

An dud man en defoa esperanç
Ober o zro gant dilijanç
Na sonjen quet er malheur
Vit dont ac'hane d'ho demeur.

Pa c'herujont en Loguivy
Nem preparjont vit ambarqui
Confiang bras ebars an amzer
Hac avel vad da vont d'ar gaer.

Commandet defoant ho beaj
Vit return gant cals a gouraj,
Mes allas ar gouet avantur
A deuje d'ho rancontr assur.

Pa sevjont ar vouël ac'hane
Demeus a bel a voelet ane,
Eur gobar gaut ho mignonet
So deut a ben rencontr dese.

Ar bos er bord ho deus bet tolet
Mes divoernian deus quet gret,
An delebomp ho tont en dro
A dro ar vag voar e gueno.

Homan a heo an extremite
Ar ganal e creis ar mare,
Eunec ho flojeal var an dour
Incapabl ar c'hanot d'ho sicour.

Mestr ar gobar gant e vreudeur
A essa appesi ar malheur,
Mes goude e oll bossabl groet
Pemp deus an dud man zo beuet.

Hoec'h ane so soveteet
Hac ar pemp al so bet beuet,
O Doue goassan calonnat
Vo homan priet mam ha tad.

An heur man a so d'he glac'harus
Hac ar beureman voaint joaus,
Daou deus a re veuet so tapet
Hac an tri al nintquet cavet.

Pa dosten da Ben-Alan,
D'ho bro en coste Pleuvian,
Ho mignonet a voa diredet
Da c'houl doare ar pardon oute.

Petra respondset ma zud quez
N'eun evelep tristidiguez,
Sonjal en danjur ma zoc'h bet
Hac en glac'har tud ar re veuet.

En Pleuvian a vo glac'har
Nemert Doue ep quen ne voar,
Anton Vorvan en naufraj-se
A voa pevoar eus e vugale.

A pa glévo grouek ar Moullac
Penos he c'heo beuet e fried ,
Pa sello ouz e c'houech buguel
Quen donç casi ve dezi mervel.

Libouban goz hac he briet
Pa gleyfont yo ho merc'h benef ,
Glac'har nefo an daou baour quez
Ho diou vere'h all so diou vudez.

Daou deuz aneze zo cavet
Hac a zo en douar biniguet ,
Ho c'horf a repos en douar
Graç ma vo ho ineo er gloar .

Cals a c'hoberi n'eus draguet
Ho essa cavet an dut venuzet ,
Mes na guever quet aneze
Doue da vo gant ho hine .

Chetu hanoiou an dut venet :
Guil ar Morvan , Guil ar Moullac ,
Neuse Louisan ar Marchant
Hac Angelic , merc'h Libouban .

Neuse Marivon ar Morvan
Tout voaint deus a Pleuvian ;
Glac'har bras da berc'hen ar vag
Beuet e nisez hac he vab .

Are zo bet sovet er fin :
Pipi Morvan , Frances Tulpin ,
Soez Morvan ha Jeanne-Mari ,
Jeanne , merc'h da Bip Nervé .

Neuse voa Carolinan Hernot
A chome an divezan voar flot ,
Pa sellas ouz a re veuzet
E speret voe casi troublet .

Quement a neuz doujanç Done
A dle pedin vit ho c'hine ,
Sonjomp pa guiteomp ar gær
N'omp quet exant deus a valheur .

N'eun recommandomp d'ar beden
Ounes eo ar gouellan moienn ,
Ouspen ma c'he guir sceul an env
Eo guir esperanç ar vué .

Pa sonjan bars ar malheuriou
Ariet ebars ar menmeus bro ,
Ober rin ar memor eus a n'e
Ma vo pedet vit ho c'hine .

O font d'an nod da Lanvode
Voa beuet pemb deus ar beure ,
A seis ebars en Toul-ar-Sten ,
Seis al en riblo ar Glensem .

Tud devot pedet evite
Me recommand dec'h quement-ze ,
Rac ho peden vo exauzet
Gant Doue dre m'ho car parset .

